



PRIZ AR VUGALE 2014

Da skolaerien skolioù
ha klasoù divyezhek Breizh

Demat,

Setu ar seizhvet **Priz ar Vugale** a vez aozet gant ar gevredigezh fea. Pevar levrig (13 000 sin, aes da lenn, istorioù a-vremañ, ur c'hard-eur lenn evit ur skolaer) a vo kinniget d'ar vugale CE2-CM2 e-kerzh ar bloavezh-skol 2013/ 2014 : « Ankou da viken », un Ankou yaouank gwasket gant ur roñfl ; « Arzhur hag an evn », ur marc'heger yaouank war hent ar roue Arzhur ; « Yaouankiz Koantig », ur yourc'hez aonig a sikour ur plac'hig ; hag « Avanturioù Zett » gant ur plac'hig divergont o vevañ e bloavezhioù 1930 e Traoñ Kerne.



Mat e vefe deomp gouzout pet rummad pevar levr a blijfe deoc'h kaout.

Ur wech resevet al levrioù e miz Here e c'helloc'h lenn anezho er c'hlas, en doare ma plijo deoc'h. Trugarez da gas deomp disoc'h ar votadegoù a-raok ar c'hentañ a viz Even.

Embannet e vo an disoc'hoù en ur skol e-kreiz miz Even. M'ho peus c'hoant e vefe aozet al lid-se en ho skol, kelaouit ac'hanomp. Moaien a vo deoc'h kejañ gant ar skrivagnerien ivez, evel m'eo bet graet er Faou ar bloaz-mañ. Enrollet oa bet pep istor gant Sten Charbonneau, trugarez da vennegiñ war ar follenn respont m'ho peus c'hoant kaout ur bladenn arc'hant (digoust), pe kentoc'h pellkargañ an enrolladenn war al lec'hienn fea pe Keit Vimp bev. Kaset e vo deoc'h keloù dre bostel gant al liammoù.

Priz al levrioù: 14 euro ar rummad 4 levr.

Profet e vo un dastumad da bep skolaer !

@ galon

Fanny Chauffin, prezidantez **fea**

FOLLENN ENSKRIVAN

Priz ar Vugale 2014



Skol :

Skolaer(ez) e karg :

Postel :

Chomlec'h :

Kod Post : Kêr :

Er skol e vo bugel o kemer perzh, rannet evel-mañ :

..... e CE2

..... e CM1

..... e CM2

☐ Gourc'hemenn a reomp **1 dastumad evit ar c'hlas** : 15 euro e kousto deomp.

☐ Gourc'hemenn a reomp **1 dastumad evit pep bugel** : 10 euro x = euro.

Ar follenn votiñ a resevimp e-kerzh miz Ebrel.

Graet d'a.....

E

Sinadur :